

Kloarek Guegan.

Mar plich ganec'h e silleofet
 Eur wers zo newe kompozet
 Da velek Guegan e c'he groet.

Ed e Gwenganik da Wengamp
 Da kana muzik exellent
 Ben ma retorno ahane
 En vo sur a kello newe.
 Ahane a ben ma retorno
 En vo sur a wel gello

Morgero goz a lavare
 De vab kloarek, ag an de se
 Setu offereniet gant Gwegan
 A c'hwi er skol kent ewitan
 Deus eur skoet a foete ar Gwegan
 Me foete pem c'houec'h, ma unan
 Klask a(1) lakad da vean belek
 Med ma mab na veet ked.

Ag en ag o respont de dad
 Eur guir a ne voa ked plasset mad

– Na man neus mado ar Gwegan,
 Neus in goneet gand e poan

C'hwi c'heus droug akisitet o re
 Na po c'hwi biken chanç gate
 O re a zo droug akisitet
 Se zo koz de n'prosperont ked.

Seiz a dud Moguero a zo ed
 Da offern newe ar Belek
 Ag o seiz e proffchont er plac
 Na rechont ked a galon vad.

Pa voa Gwegan gant an hent o vonet
 Eun dimezel vrao neus rencontret
 Humblamant e neus i saludet
 Belek iaouank din e leret

Pelec'h e heed a ma oc'h bet
 — Me a deu deus ar bourg a Pontvelle
 Da larat ma offern newe.
 Ma deud deus ar bourg a Ponvelle
 C'hwí lavaro din a wirione
 C'hwí laro din ag en a zo
 Denchentil kloarek Mogero.
 — Dimezel iaouank, ma nem c'hredet
 En Mogero na fiet ked
 Na fiet ked en Mogero
 Recevet n'deus daou urcho
 A prest da receo an trivet
 Gant daouzek deio Nedelek.

An dimezel iaouank a lavare
 Da Kloarek Mogero ag an de se :

— Da pera na deud tu war ma zro
 Na da ober goap ahanon
 Recevet o c'heus daou urjo

A prest da receo an trivet
 Gant daouzek deio Nedelek :
 Gant o kinder Wegam a meus klewet.

Pa voa Gwegan gant an hent o donet
 Eur gwel renkontr neus renkontret
 E dad a kloarek Moguero,
 Daou kloarek all deus a Wélo
 Ag int o vond deus e pedi
 Da vond gante dan hostaliri
 Na da vond gante de goanian
 Arc'hant o devoa da pean
 Na da tava ar gwin newe
 A oa sellieret an noz se.

Kement a rejont deus en pedi
 Ag en mond gante dan hostaliri

Na pa devoa o c'hoan debet
 Ar konklusion a voa groet
 Da lac'ha ar paour kez belek.

Pa c'hoant prest da partian
 komansaz ar c'hog da ganan
 An hostizez o larat dean :
 — Guegan chomet ahan dan de
 Eun tra benag zo a newe.

Ahan dan de na chomin ked
 Ma mam ganen a ve jennet
 Me wel va mam en dall e zan
 Karget e c'halon deus a doan
 Welet arri er ger marc'h ar belek
 Ag en siwoas ne arri ked.

Pa voa Gwegan gant an hent o vonet
 E kinder ontan zo dizroet :
 — Na teus ked a chonj va mignon
 E voas te bed ambition
 Dirag eun dimezel vrao meurbet
 Peneverdout me moa i bed.
 — Ma res hassusis ag e ris
 ober ewidout a chonjis
 O klask ober ma viches belek
 Ma vichemp on daou kamaradet
 Ma c'hinder paour, a na veomp ket.

Lar da in manus pa guiri
 Rag e c'fout eun (2) eur ma virvi.
 Atrao Doue possub e ve
 E ve ma c'hindero em lac'hfe
 A ni om daou er memes ker
 O dibi om bara dibreder
 A mimp(3) on daou er meumeus ti,
 O tibri bara disourcy
 A nim bugale dan diou c'hoar
 Ran a rai'o c'halon gant klac'har.

Seitek toll kontel a neus bed
 Kent ma eo d'an douer koeet
 Was ewid ma eo d'an douer koeet
 Was ewid den e he eman
 Pa neus resistet petek keït man.

Eur breurik bihan a neffoa
 A woa oajet deus a ~~seiz~~^o vla
 A klevas eur voez o kriel
 Deus e vreur belek e voa hanvel
 Voa kasset da Wengamb tout esprez
 Da interroji an hostizez :
 – Hostizez paour din e leret
 C'heus ked goelet ma breur belek ?
 – En eiz eur da noz e voa aman
 Kompagnonez vad e voa gantan
 Gantan voa kompagnonez vad
 Kloarek Mogero ag e dad
 E dad a kloarek Mogero,
 Daou kloarek all deus a Wélo.

Jannet ar Gwen a lavare
 Woar vene Bre ag an de se :
 Otro Sant Herve, emezi
 C'hwi zo var an huel o ti
 Ag a wel an dour er rinviero
 Ken skler ag an heol er feunteunio
 Reit tu din kello deus va mab
 A me rei dec'h eun disro mad.

Pa voa gant an hent o vonet,
 Eun den ancien en deu(s) renkontret
 Ag a roas dei da intent
 E voa ar c'horff maro en hent.

Janned ar Gwen a lavare
 En tall e mab pa arrie :
 Pelec'h eman ar vuntrrien
 N'eus laked va mab evel en
 Pem kant skoet an heol e din kousket
 Ma mab deus da ober Belek
 A pa goustoffe din pem kant all
 Me renko revenc'h an dud fall.

Madeleine.

(1) *Ms : a ; o (ho, vous).*

(2) *Ms : eun ; lire : en ; – dans le même vers : ms : virvi ; lire : varvi.*

(3) *Ms : mimp ; lire : ni (ou nim, nimp).*